

- 81 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

30. AR MORVAN KOZ

Tenval ann noz ha glao a ra
eun ebad eo mont da nosvesia (bis)

eun ebad eo mont da nosvesia
deomp da di'r Morvan da genta

da laerez ar ialc'h hag an arc'hant
hag Annaik Morvan a zo plac'h koant.

- Lavar din me, va faotrik bihan,
hag hen-ma 'n hent da di'r Morvan ?

- eet bepred eeun gant ar vali
hag e tigwezot gant ann ti.

e ti'r Morvan koz pint erruet
tri daol war ann noz ho deuz skoet.

Annaik Morvan pe deuz klevet
da brenest he c'hramp zo dilammet.

- va mam choumit etal ho tan
pe e vezimp lazet holl gwitibunan.

Rak ne deo ket evit ober vad
int deut pevarzek en eur bagad

- digorit ann or, va magerez,
me zo bet enn ho ti aliez

Me zo bet aliez enn ho ti
o tibri va boued dizoursi.

o tibri bara gwiniz ha leaz dien
/hag/ ar pez a garen da c'houlenn.

- leveret pep hini pez a garo
'n or d'am map mager me zigoro.

E ti'r Morvan koz paz int erruet
debonjour ho deuz lavaret.

- 82 -

- De bonjour ha joa enn ti man,
Annaik ar Morvan pelec'h eman ?

- Ma eat dar foar da Vrenniliz° ° E kanton Pleiben
da brema eunn habit dioc'h he diviz,

da brema'n habit du voulouzet;
warben° diziou genta he eured ° = a-benn

warbenn diziou genta he eured.
c'houi tud chentil ar c'henta pedet.

Kemerit skabel da azeza
peadra a zo evit koania.

- Na ne deo ket evit klask hor c'hoan
omp deut enn noz man da di'r Morvan.

da laerez ar ialc'h hag ann arc'hant
hag Annaik Morvan zo eur plac'h koant.

- Setu ann alc'houesiou, klasket hi
ha list ho buez gant tud ann ti.

dreist holl gant va map ker kloarek
zo nevez deuet euz a Naonet.

N'oa ket he c'her peurachuet
ar vagerez koz a zo lazet.

enn eur gramp eno etal an tan
edo kuzet Annaik ar Morvan.

ha pe deuz klevet laza he mamm
zo deut anezi gant esplamm.

- Annaik Morvan, ha red e ve
ez aez te gwerc'h azirak Doue ?

- ha pa rannkenn mervel goulskoude
me ielo gwerc'h a zirak Doue.

n'oa ket he ger peurechuet
Annaik ar Morvan a zo lazet.

- debonjour d'id°, Kloarek Morvan, °a-us : te
te hon anavez holl gwitibunan.

- 83 -

- Me ne anavezann hini ac'hoc'h c'houi^o
nemet hoc'h-hu, Kloarek ar Muzi.

^oKomp.: ac'h
hoc'h-c'hwi,
brezh.komzet

nemet hoc'h-hu, Kloarek ar Muzi,
hoc'h euz va dalc'het da vadezi.

O va Doue, ha red e ve
eo va faeroun-me am lasfe.

- Me a wel digor kornik ann or
savete da vuez, va fillor.

Mez eunn ozac'h koz a oa enn ti
pini oe penn kaoz a walheuri.

- Mar chom e vuez gant kloareg Morvan
hon diskuillo holl gwitibunan.

mar lezomp Kloarek Morvan da veva
a lakai krenn hon dibenna.

N'oa ket he c'her peurechuet
eunn dag enn he galoun zo plantet

pa blanten va c'hleze enn he galoun
e lavare : aiou, va faeroun !

ha pe flanten ennhan bete'r groaz
e lavare: houman ar gloaz.

Oh Introun Varia a greiz Ker
Ra zigasi ar Morvan koz d'ar ger

Na da lakaat enterri he dud
a zo lazet evel chatal mud

N'oa ket he c'her peurechuet
n'oa ar Morvan koz er ger arruet.

- Kloarek ar Muzi, lavar d'in me
peleac'h c'heuz-te enterret va zud-me ?

- Va magerez koz a zo er zal
ha ne d-ema ket doun enn douar,

ha ne dema ket doun enn douar
dre ma ne gavern ket ar bal.

- 84 -

Annaik Morvan zo er jardin
ha dindan eur boket Romarin.

nag er bern teil e tal ann or
siouaz! eo anterret va fillor.

na dre ma toullen dindan han^o °a-us: dezhan he vez
e save ato he vreae'h war gorre.

- Kloarek ar Muzi, din leverit
perak euz ar vro-man e diit.

- euz ar vro n'hellan ket monet
rag ann anaoun paour zo o viret.

Pa zonzann mont enn tu all d'ar mor
e vez o viret dourn va fillor.

vvvvvvv